

## KIS-755 – Gwirioù mab den hervez Hannah Arendt

(GE – 25 04 02)

[Evit skañvaat ar skrid ez eus bet bodet en dibenn anezhañ notennoù yezhouriezh galvet dre ur \* ha renket hervez urzh al lizherenneg.]

“Kerkent ha ma voe roet furm dezho en Diskleriadurioù meurlidel\* graet da heul an Dispac'h gall, e voe enket Gwirioù mab den etre ur meizadur naturelour ha hiniennelour eus ar gwir, ur gweladur arc'hwelelour eus ar Stad hag ur c'healiadur dengreizour” (RL, p. 29), a skriv Robert LEGROS<sup>1</sup> o kregiñ, da heul Hannah ARENDT<sup>2</sup>, da zebrannañ unan eus krefen loskus hon amzer — meizadur naturelour ha hiniennelour, pa intended ar gwirioù evel o tinaouiñ diouzh un meni “natur” denel hag o vezañ gwriziennet en hiniennoù kent d'ar re-mañ bezañ kevaotet\* ent politikel ; gweladur arc'hwelelour, pa zireed ar galloud politikel da renk un araez hepmuiken, Diskleriadur 1789 o haeriñ ez eo pal nep kevaotadur\* politikel kemmirout an kez gwirioù naturel ; kealiadur dengreizour ha prometee, pa lakaed andon ha finvez ar gwirioù en Den end-eeun, o taveiñ e se da zodenn un den riek, da zerc'henn ur boud digaezh\* ha peuremren, o tougen e vriegezh ennañ e unan hep dave da urzh all ledanoc'h, bloc'hel pe drehontek.

### DIAC'HINADOU GWIRIOU MAB DEN

Gwirioù mab den, hag int dezrevellet gant Diskleriadur 1789 evel “pennaennoù didro ha direndael”, zo koulskoude diac'hinadoù bras dindan o eeunded . Hemañ da gentañ bet lakaet war wel gant BURKE<sup>1</sup>, heuliet er c'heñver-se gant MARX : hag int

---

<sup>1</sup> Robert LEGROS, “Hannah Arendt : une compréhension phénoménologique des Droits de l'Homme”, *Études Phénoménologiques (É.P.)*, n° 2, 1985, pp. 27-53 [teskanvet RL amañ].

<sup>2</sup> Hannah ARENDT, *The Origins of Totalitarianism*, 1951 ; *L'Impérialisme*, tr. gant Martine LEIRIS eus eil lodenn al levr (*Imperialism*), Seuil (coll. “Points Politique”), 1984 [teskanvet LI amañ]. Sl. KIS-749 – Hannah Arendt ha keal an niñvañ, La-15, pp. 95-114.

<sup>1</sup> Edmund BURKE (1729-1797), den politikel saoz eus al luskad *whig*, aozer eus *Reflections on the Revolution in France* (1790), a voe a-hed ar wech eneber feuls da brederouriezh c'hall ar Sklerijennadur. E arzaeladur eus ar gealiadurezh hiniennelour, naturelour ha poellelour, evitañ

bezant en den dre natur hag anaralladus, ez eo Gwirioù mab den tra un den riek ha peuremren, frank a bep desaveladur kevredadel<sup>2</sup> hag istorel, un den derc'hek enta, goubarek\*.

Diac'hinad all, bet spurmantet gant ar romanteion : mard eo an denelezh mestrez warni he unan, digaezhet\* diouzh nep urzh a ve dreist dezhi, hep finvez estregeti he unan, hep diazez estregeti he unan, ha ne biaoufe ket ar gwir da drozañ ar c'hendivizad skritellet Gwirioù mab den, ar gwir da skouer da ziferañ ent werinek — eleze dre ar muianiver — ez eo spletus dezhi, denelezh e kement ha kevanenn, dispeuziñ reoù 'zo eus he darnoù ? Kontrol emañ enta meizadur naturelour gwirioù mab den d'ar meizadur dengreizour anezho : tra ma wisk warno an delvadur\* naturelour doareoù nevet — ouzh o sellout evel enganet hag anaralladus —, e tinaou en eneb eus an delvadur\* dengreizour ur selled lazegour a zinac'h outo nep perzh trehontek ha n'o anavez ket evel dreistardizh.

Trede diac'hinad : diouzh un tu haeriñ ez eo gwirioù mab den rakvezant d'an ensavadur politikel hag, evel gwirioù naturel, dizalc'h diouzh ar geodedourelezh, diouzh an tu all darbenn e vez an denion hep gwirioù keit ma n'o deus ket diraezet ur furm a Stad, an hini end-eeun a zo amkan an Diskleriadurioù he diazezañ dre ensaviñ riegezh ar bobl hag ar vroad ; “alese, a verk ARENDT, e voe dizale kemmesket dizirouestl argraf gwirioù mab den gant argraf digaezhadur\* ar vroad”.

Diwar vont e tenn Hannah ARENDT an evezh war un azlamm kempred eus an diac'hinad-se — gwirioù mab den dizalc'h ent derc'hek diouzh ar geodedourelezh hag ar vroadelezh daoust ma vezont e dalc'h strizh anezho war an dachenn — dre ober anv eus neridigezh a-yoc'h an anvroidi, ar milionoù-se a repuidi argaset eus o bro gant an dispac'hioù komunour ha faskour : “gwirioù mab den, anaralladus dre bennaenn, a ziskouezas bezañ andoujadus, ha pa ve er riezoù edo diazezet warno o bonreizh, bewech ma erruas tud na oant mui keodedourion ur Stad emveliek” (LI, p. 276). Degouezh ar c'hampoù repuidi a ziskouez ez a gwirioù mab den *meizet evel dizalc'h diouzh ar geodedourelezh* d'ober

---

da vezañ bet renet en anv an hengoun hag en un diarsell mirelour, a gendalc'h da bourchas danvez d'an dezevoudion bolitikel.

<sup>2</sup> En e studienn a gemeran harp warni evit an notenn-mañ (en ur zerc'hel ul lagad war destenn ARENDT), e laka Robert LEGROS dindan Gl. *social* ur bodad kealioù arveret gant ARENDT da arouezañ liammoù kumuniezhel ar genel, ar renkad, ar gravez, an hanez e kement ma venn o enebiñ ouzh liamm ar geodedourelezh. Heuliañ a ran LEGROS e hevelep eeunadur hag ober gant Br. *kevredadel*.

n'eo ket hepken ur “c'houbaregezh\*”, met un touellerezh skrijus, “an azon splann eus un derc'helouriezh dispi, eus ur pilpouzerezh gwallus ha diot” (LI, p. 243).

#### GWIRIOU MAB DEN HA KEODEDOURELEZH

A dra sur, n'eo ket pal Hannah ARENDT freuzañ keal gwirioù mab den met, en eneb, dilesa an diazez politikel ez int dre sklaeraat o diazez prederel. Stiañ a ra he devezerezh war an diac'hinad diwezhañ ha merkañ ez eus daou zoare d'e zeveizañ : gwirioù mab den a raklaka ar geodedourelzh pe *dre zevoud*, e kement ma 'z eo hi un araez d'o gwareziñ, pe *dre bennaenn*, e kement ma 'z eo lodek en o anien.

Ensellout a ra an deveizadur kentañ. Hep gwarez ur galloud, e tiskouez an devoudoù ne vez gwarant ebet ma ve doujet da wirioù mab den. Er ster-se ez intenter an ensavadur politikel evel ur c'halvezad ret da gemmirout ar gwirioù naturel pe anpolitikel evel ma 'z eo ret ar brouti da wareziñ ar plant ouzh un hinad na vent ket evit he gouzañv dic'houmor. Bezant eo bepred an diac'hinad, rak an *naturel* — kemeret gant ar meizadur hiniennelour-naturelour evel heñvelster da anienel, hollveziadel, anamzerel, solwezel, e berr : da *retvezek* — zo roet amañ da *zeberzhek* : emañ e dalc'h ur c'halvezad. Stignet eo an diac'hinad etre deberzhegezh ar bonel (natur hollveziadel mab den) ha retvezegezh ar c'halvezad (ar geodedourelzh). A-benn ar fin, a not ARENDT, e kaver eno ur rezhenn nevez eus an diac'hinad ditouret gant an *Aufklärung* : ur c'halvezad ret da araokaat ar Poell (naturel hag hollveziadel) eo ar politikel evitañ da chom e-maez krap ar Poell.

ARENDDT avat ne gav ket he gwalc'h gant hevelep deveizadur. Donoc'h e fell dezhi mont : gwirioù mab den a amplex ar geodedourelzh, hervezi, n'eo ket dre zevoud, met dre bennaenn. “Mar koll un den e staelad politikel, e tlefe, en askont eus endalc'h gwirioù piaouel hag anaralladus mab den, emgavout er blegenn resis rakwelet gant Diskleriadurioù an kez Gwirioù [eleze evel piaouer anezho bepred]. En devoud, ar c'hontrol eo a c'hoarvez : an den nad eo ken nemet un den en deus kollet ar perzhioù a ra d'ar re all ober outañ evel ouzh o c'hetpar” (LI, p. 288). Mar tremener gant an intentadur hiniennelour, naturelour ha dengreizour eus gwirioù mab den, e ranker a-gempoell darbenn ez eo koll ar geodedourelzh kement ha koll un doaread “kalvezadel”, “darvoudel” ha n'eo ket un doaread enlenat d'an *natur* denel, da anien an den. Hervez Diskleriadurioù an 18<sup>t</sup> kantved, ez eo gwirioù mab den enlenat d'ur solwezel (natur an den), tra nad eo ket an doareadoù politikel muiget modoù darvoudel eus an kez solwezel. Rak se e rankfed darbenn e c'houbad\* an natur denel goude ma vez

dibourc'het an den eus e wirioù politikel ; muioc'h, e tlefe neuze anadiñ anien an den en he glanded — evel koar DESCARTES ur wech lamet diwarnañ e “neuzioù diavaez ha haezel”. Hogen n'eo ket se a c'hoarvez. Adal ma koll un den e staelad politikel ha ma hañval dre se bezañ “un den nad eo ken nemet un den”, e koll evit gwir an doareadoù a rae anezhañ un den.

Hannah Arendt a adkav aze un diac'hinad ditouret gant Aristoteles : an *oujsiva* — ar solwez, an anien — a c'haller sellout evel an “dangor<sup>1</sup> kentañ” eus un dra : n'eus ket anezhi un ardaolad, met pezh a zo daveet dezhañ an ardaoladoù. Hogen, ent diac'hinek, pa zistager an ardaoladoù diouzh o dindanad war glask d'ar solwez, ne chom eus hemañ, ur wech dibourc'het eus e holl zoareadoù, nemet an danvez na mui na maez : an dra a vened diraez e solwez zo bet loezet e-kerz ar wezhiadenn a erdante d'e ziskelañ. E-lec'h ur saveladur yaek leun ne c'houbad\* nemet ansaveladur razh.

ARENDR a zedallv diac'hinad ARISTOTELES d'an dended : he sellout a ra evel un dindanad a zibourc'her eus he doareadoù denel. O vont d'un “den hollek”, eleze d’“un den nad eo ken nemet un den”, e tlefe an dibourc'hadur diskelañ an natur denel noazh ha pur ; e gwir, an disoc'h n'eo ket an den diles — pe, evit adkemer ur c'hemm hon eus degaset e lec'h all <sup>2</sup>, n'eo ket an *anien* den, met an *hennad* den — met un den diforc'h ent hollek, un hinienn kollet ganti pep ster, a denn neuze da vezañ “ur skouerenn diforz eus ar spesad loenel anvet den” (LI, p. 291), un *nepeziad* \*.

Ur wech diskuliet an amforzh ez eo keal un *natur denel* a ve an den ampartet dre ouzhpennañ dezhi ardaoladoù, en o zouez gwirioù mab den, ez emgav ARENDR dirak daou hent : pe emblegañ da anzav ez eo amoet aoz mab den<sup>1</sup>, pe derc'hel d'he feiz e galvedigezh an hini “a zo bet krouet evit ma ve un derou<sup>2</sup>”. An hent-mañ diwezhañ a zibab : haeriñ a ra ez eo *dre bennaenn* e raklaka gwirioù mab den ar geodedourezh. An digemmañ hengounel etre ar solwez hag e vodoù darvoudel ne zere ket evit ober meiz war an darempred buhezel, hanvoudel — ar *c'hesoutañ*\* — etre an den hag ar c'heodedour. Gwirioù mab den ne vezont ket debarzhed d'un dended rakpolitikel, met o

<sup>1</sup> A-zivout keal an *dangor* (*uJpokeivmenon*) e prederouriezh ARISTOTELES, sl. KIS-584, La-12, pp. 128 hh.

<sup>2</sup> Sl. KIS-093, La-05, pp. 68 hh.

<sup>1</sup> Sl. KIS-555, La-11, pp. 362-364. A-zivout dehentadurioù prederel all a zegasas da erlec'hiañ aoz mab den ouzh *natur mab den*, sl. KIS-470, La-10, pp. 256-259.

<sup>2</sup> Sl. KIS-749, La-15, p. 114.

sabr a dennont eus ar geodedourezh ; alese koll ar staelad politikel zo kement ha dioueriñ gwirioù mab den. Dont a ra an den da vezañ un hinienn unveziat ha louerek dre biauañ gwirioù mab den ; dre goll gwirioù mab den ez a d'un den goubarek, nepeziat\*.

Hannah Arendt a zistro da saviad an anvroidi a gemer da vaen touch<sup>3</sup>. Evito, koll o staelad politikel ha gwirioù mab den n'eo ket ur gudenn debouezek. Buhezañ, kantouezañ a reont dañjer “noazhder an hini nad eo nemet un den” (LI, p. 288). Anglevout a reont an kez noazhder evel o distro da stad an “danvez”, d'ar c'houbaregezh c'houllo. Ha dres evit hepkoriñ hevelep noazhder, hevelep goubaregezh, rak aon da vezañ sellet evel loened, e stourmont — hag evelto e stourm ar bihanniveroù a zo en arvar o gwirioù politikel — “da zerc'haviñ o broadelezh evel aspadenn diwezhañ o c'heodedourezh kollet, an azon angemeret\* diwezhañ eus o bezañs er bed” (LI, p. 288).

### LIESELEZH HA KEDVED

\*

Penaos intent furm nevez an diac'hinad a laka Hannah ARENDT war wel o taveiñ da zegouezh an anvroidi ? Penaos e c'hell gwirioù mab den diwanañ en ur Geoded politikel, ma n'emañ ket o andon nag en natur nag en hiniennoù, ma ne zinaouont ket diouzh ur mennoz dengreizour ? Daoust hag ar politikel e kement ha henn a c'hell genel ar galloudezhioù denel a ve en orin gwirioù mab den ? Amañ e tispak an aozerez he dodad : emañ gwirioù mab den a-geflen gant al *lieselezh denel* hag ur bed boutin, ur *c'hedved* Evit spisaat hevelep meizadur e ranker respont da zaou aters. Da gentañ : pe geñver zo etre ensavidigezh ar politikel hag ensavidigezh al lieselezh denel hag ar c'hedved ? D'an eil : e pe zoare eo lieselezh ha kedved amlegadoù an doujañ da wirioù mab den ?

Ar respont d'an aters kentañ zo en despizadur dibar, argammedek, a ra ARENDT eus al *lieselezh denel*. Ne spir ket bevañ a-gevret, amparañ ur c'hevredad evit perzhiañ el lieselezh. Houmañ ned eo ket un devoud naturel : e kement ma 'z eo an denion gougevret<sup>1</sup> ouzh ur spesad loenel, ma 'z int ar bevion eus ar spesad denel, ez int holl kevun<sup>2</sup>, o diforc'hioù hiniennel zo hep ster ha darvoudek rik. Ar bevañ el lieselezh

<sup>3</sup> An dodenn greiz eo er *Chabistr V* eus *L'Impérialisme* : “Le déclin de l'État-nation et la fin des droits de l'homme” (pp. 239-292).

<sup>1</sup> Sl. KIS-317, La-08, p. 245.

<sup>2</sup> Sl. KIS-737, La-14, p. 371.

n'eo ket ar c'henveañ naturel enta, met n'eo ket ar c'henveañ kevredadel naket. Anv a ra ARENDT amañ eus *diac'hinad ar c'hevredadel* : an doare en deus mab den da vevañ a-gevredad a ranker moarvat lavarout denel, koulskoude, koazhet d'e voud kevredadel, e paouez mab den a vezañ denel en e henn. En un diarsell ez eo ar c'hevredadelaat kement hag un denelaat (un dont e-maez al loenelezh), nemet ez eus anezhañ un dizenelaat war un dro. A dra sur, e pep kevredad denel e vez trevnet ijinus ar bevañ a-gevret ha disheñvel kaer eo ar c'hevredigezhioù diouzh ar c'hevredadoù loened, neoazh pegen pell bennak ma 'z eo an ensavadurioù denel diouzh an arc'hwelioù naturel, emañ direet an den kevredadel d'ur savlec'h en e gevredigezh, d'ur c'hefload, d'ur roll kendivizet ha sujet da zavedoù savelet. Donoc'h ez a ARENDT en he despizadur dre resisaat : ar sujañ da zavedoù savelet, d'ar roed, a ra eus gwezhiañ mab den ur *realañ* hepmuiken. E kement ma 'z int izili ur c'hevredad, e vez an denion o realañ, ersavioù o devez an eil re ouzh ar re all, met ne zaveont ket an eil re d'ar re all e kement ha hiniennoù unveziat o kenemveizañ en o unveziazezh. Hep mar, ez eo ar c'hevredadelaat amplegad ar bevañ denel diles, ar gedvuhez\*, hogen tud peurgvedadelaet ne vefent nemet skouerennoù eus patromoù roet, gwerc'hennadoù ur “spesad” (kevredadel), dic'houzvez eus al lieselezh denel.

Bevañ el lieselezh pe c'hoazh en ur c'hedved, er gedvuhez, zo enta bevañ e-touez hiniennoù na emanavezont ket evel skouerennoù kevun eus an un patrom, a zave pep hini d'ar re all evel da gement all a unveziadoù diforc'h, spisoc'h : gwehan\*.

Al lieselezh, ar c'hedved zo enta en tu-hont n'eo ket hepken d'ar bevañ naturel, met ivez d'ar bevañ kevredadel. Evit emgavout en ur bed — evit ma ve ur bed ha n'eo ket ur metou, gwikefreoù ha strukturioù —, e ranker bezañ e-maez krog kelc'htroioù ar beved ha kabestr an darvennoù lazegour. Dizehan e tistro ARENDT war ar c'hraf, pa oar moarvat pegen gwarius eo he dodad diouzh ar c'hedveno o ren er riezoù frankizour hag er renadoù hollredior ha pa vent komunour, faskour pe integrour, pegen kontrolius ivez d'ar soliadelouriezh a zo hini skiantoù an den pa reont eus ar gevredadelezh domani kement devoud a denn d'ar bevañ a-gevret. Undalc'h zo d'ar c'hedved bennozha da liested an diarselloù : gwarant eo houmañ d'an dreüded, treüded andoniek an denion, treüded kedet an traoù<sup>1</sup> ; mar paouez an diarselloù a gevaskerc'hañ\*, e vez digenvezet an hiniennoù ha dastamm ar c'hedved. Mar bez gwelet an traoù diouzh un diarsell hepken — hini un den digenvez pe *ur stroll*

---

<sup>1</sup> A-zivout an daou arvez eus an *dreüded*, sl. KIS-501, La-10, pp. 397-398 ; KIS-540, La-11, pp. 213 hh., 232.

*unambred* — ne vez mui gwarant ebet d'o zreüded hag e kollont pep kantalc'h. An unambred kevredadel (ez eo an “unpreder” an arvez kefredel anezhañ) zo an digenvez razh, mirout a ra a vuhezañ ar werc'helezh.

Merkomp ne ensamm ket Arendt an tamall a ra an eil re d'ar re all komunourion ha frankizourion war an doare da frammañ ar gevredad-elezh. Ur gevredigezh graet gant hiniennoù oc'h asantiñ bezañ direet da savlec'hioù ha da arc'hwelioù kevredadel, da vezañ kombodet en urzhazoù, e berr da vezañ kevredadelaet, n'eus enni na lieselezh, na kedved — ha pa ve anezhi ur gevredigezh yoc'hek a rizh kornogat pe ur gevredigezh hollrediek a stil reterat, ha pa renfe enni pe kenniñvoù etre unambredoù pe an unambred plaen.

Hogen, ha pa ve o tastammat pe oc'h unambreataat\*, e tenn ar c'hevredadelaat da forc'hiñ an hiniennoù diouzh un egor boutin ha foran ha dre se d'o c'hlozañ en ur “bed” prevez. En ebeb hag ent diac'hinek, an diframmañ diouzh ar c'hevredadel, pell a gantañ an dud en o buhez prevez evel ma krede da Jean-Jacques ROUSSEAU, a ro bezusted d'un egor foran, d'ur bed boutin : ar sujañ d'ar c'hevredadel eo a ro lañs d'ar prevez.

Div evezhiadenn all a gavan mat ensoc'hañ amañ.

An hini gentañ. Ne lakaan ket Arendt da lavarout e tistaol ar gevredad-elezh, muioc'h eget ma tistaolfe an natur. Goude ma 'z eo ar perzhiañ en natur hag ar c'hevredadelaat ampegadoù nep kedved denel, ne ve an den naturel rik koulz hag an den peurgevredadelaet nemet izili kevun eus ur spesad naturel pe gevredadel dic'houzvez eus liested an diarselloù hag ar staeladoù a c'houstenn ur gedvuhez diles.

An eil. Hañvalout a ra Arendt kouezhañ en un arc'hañ da gentaenn. Gwirioù mab den n'int ket enskrivet en natur, ne zisoc'hont ket eus ar c'hevredadelaat, met gwriziennet int el lieselezh ha rekizañ a reont ar c'henved da vezañ embreget. Hogen lieselezh ha kedved zo roet da arbenn bezañ an eil d'egile. Bac'h eo ar c'helc'h ha ne ouzomp netra eus o geneliezh. Dav eo derc'hel kont eus ur stil dehentiñ hon eus bet tro da venegiñ c'hoazh : ARENDT ne hañval ket bezañ chalet da genvellañ luskadoù he devezout ; lakaomp ivez ez eus anezhi ur brederourez a zo an alamaneg he yezh kentañ hag e skriv aze e saozneg. Pelloc'h en he levr e ro an alc'houez o tivorailhañ ar c'helc'h bac'h en ur zioueliañ he c'hredenn don, awen he freder : “krouet eo bet mab den evit deraouiñ”. Pa lavar enta ez eo ar perzhiañ en natur hag ar c'hevredadelaat ampegadoù (“conditions *sine qua non*”, RL, p. 39) al lieselezh hag ar c'hedved, ez a dre ul lavar laosk : *bonveziadoù* eo an termen dik. An *deraouer* eo pezh a anvomp *nidiad*, eleze an hini ma teu drezañ an

digent er bed, hag “ampleadoù” an digent zo en ul lavar resis ar bonveziadoù anezhañ.

### AR POLITIKEREZH

N'eus ket a gedved hep lieselezh pa ampeg houmañ daskended an diarselloù hag, a-c'hin, n'eus ket a lieselezh hep ur c'hedved pa ampeg un egor ma c'hell an hiniannoù emerzerc'hañ, emziskuliañ dezho o unan hag an eil re d'ar re all en o unveziadezh. E se, ar politikerezh, pell a vezañ un arc'hwel kevredadel, zo un troc'h diouzh nep modelezh kevredadel rik a'r bevañ ; rak se e lak un troc'h ivez etre diouzh un tu un domani a zle chom prevez, ma ren un doare denel da dalañ ouzh “amgant ar roed strizh” (LI, p. 290), ma vez gwardet amparoù ar bezoud denel na vent ket evit gouzañv goulou ur bed boutin ha, diouzh an tu all, un domani amberzet d'an anadiñ en e henn a zo egor foran al lieselezh.

Prezeg souezhus hemañ a dra sur p'en lakaer a-geñver gant ar politikerezh a anavezomp en dro dimp. D'e intent e rankomp moarvat ober un distro dre an Anadennoniezh, manet diskiblezh diazez Hannah Arendt, ha daveñ da rummennoù ar *bezus* hag ar *beziat* bet kevenebet gant prederourion evel Richard Kearney<sup>1</sup>. Ar pep orinelañ e doazhadur Arendt eo e tebarzh d'ar politikerezh ar gefridi da vezañ en arempred ar bezus, dre dreñ kein nann d'ar beziat, natur ha kevredadelezh, met d'ar sell a ra anezho roedoù kloz warno o unan e dalc'h digen o saveleñoù. E berr, roll ar politikerezh zo plediñ gant ar bed n'eo ket evel beziad roet ha savelek, n'eo ket evel bezus — rak dre zespizadur emañ ar bezus e-maez krap nep galloud —, met evel *bonveziad*, eleze evel egor an deraouiñ, maezienn ar rezid. Kraf nevezus all eus an doazhadur : lec'h an deraouiñ, ar rezid, lavaromp : an *nit*, n'eo ket unelezh ar gouzrec'h, bac'h na voe na HUSSERL na, dre vras, prederourion

Korno

<sup>g</sup>

<sup>2</sup> evit he frankaat, met al lieselezh. Diac'hinad all : unveziadezh an

<sup>1</sup> Sl. KIS-735, La-14, pp. 345 hh.

<sup>2</sup> En ur lezel a-gostez evelkent dezevourion evel RICŒUR ha KEARNEY. Ne c'haller ket lavarout emañ ARENDT o kinnig un hent na ve ket o hini. Da skouer, pa skriv KEARNEY : “*bezusted ar Rouantelezh ne lam ket diganimp hon atebegezh war ar bremañ, war ar gwerc'hel, he c'hadarnaat ne ra ken*” (KIS-735, La-14, p. 365), e laka kefleuniadur an denion e dalc'h an doare ma pledont a-gevret gant ar bed. ARENDT a venn kas pelloc'h an hent o c'hervel



hinienn ne vez ket roet en a-raok, diskuliet e vez, anadiñ a ra, dre berzh ar c'hedved goustennet gant lieselezh an hiniannoù. Evel merket c'hoazh a-zivout hanc'herieg Arendt, e ranker adwelout, adeiladiñ kemeradur an termenoù : “diskuliañ” amañ n'eo ket diskelañ un dra bezant endeo hag enkelat met, war un dro, krouiñ ha diskouez ; “anadiñ” a verk emichañs meizadoù huserlek an *Erscheinen* hag ar *Sinngebung*, ar stergediñ, met digent eo ar pezh a anad hag ar ster a vez roet.

Dleout a ra ar politikerezh mirout a vezañ ur mererezh kevredadel rik, diwall ivez na emellfe ar c'hevredadel en aferioù foran, herzel diastal ouzh degerc'hadur an obererezhioù denel gant ar c'hevredadel ha, dre vras, gant an argerzhioù bevedel, istorel pe “politikel” er ster boas — troet eo selloù an aozourez etrezek ar Stad lakaet en arempred ar “ouenn” pe ar genel drec'h, ar renkad bourc'hiz pe broleter, ar galloudoù arc'hantel-armerzhel, ar yuzhoù a lazioù, h.a. Herzel diastal, rak nepred ne c'hell ar gwezhiañ politikel dizalc'hediñ evit pell amzer, nepred ne vez gounezet da vat an digaezhadur\* diouzh argerzhioù ha kelc'htrioù emgefreak an natur hag ar gevredadelezh. Dalbezh e vez an etrewezhiañ denel en arvar ar c'hevredadelaat : en hevelep doare ma pourchas an natur danvez d'an oberoù denel ha, war un dro, ma kinnig o islonkañ dre o c'henkizañ hag o diverkañ kerkent ma 'z eer diwar o zro, ez eo ar gevredadelezh danvez rekis an denelaat en ur vezañ neoazh en araez da aloubiñ ha da zispenn al leurenn diwel ma vez skoulmet an darempredoù denelaus etre hiniannoù unveziat (RL, p. 41). E berr, ARENDT ne zistaol ket ar pezh eur boas da c'hervel ar “galloud politikel” ; daoust ma n'en lavar ket ent ezhpleg, ez anavez dezhañ daou vlein : diouzh un tu an astenn e-barzh ar gevredadelezh denel eus furm ar galloud o ren er c'hevredadoù loened<sup>1</sup>, diouzh an tu all, ar galloud da astaliñ an argerzhioù naturel ha kevredadel war-benn bezañ den diles, an hini “a zo bet krouet evit ma ve un derou”. N'emañ ket enta en utopiezh, en nalec'h : merkañ a ra da vab den e wirioù, ouzh o c'hantreizhañ nann dre an natur pe un arvez kevredadel, kenel, renkad, kravez pe all, met dre un dlead finvezel.

Kuites da gouezhañ en azlavar, e klaskin ezrevellañ an doareoù eus gwirioù mab den hervez Hannah ARENDT, en ur verkañ o deus an un endalc'hed hag ar

---

“politikerezh” an doare plediñ-se, o haeriñ bezusted un egor en amen an denelezh a ve pezh a ra anezhañ KEARNEY e lavar an Aviel “*treuzneuziadur finvezoniel an Douar e Rouantelezh*” (*ibid.*, p. 364).

<sup>1</sup> Un dezrann eus ar galloud politikel a gaver e NOTENNOU POLITIKEL (2), *Emsav* 26, 1969, pp. 49 hh.

perzhioù anvet ganti lieselezh, kedved, keodedouelezh, kevarzhelezh — hevelep ledanviñ, hevelep arunderc'hañ, pell a vezañ merk ur c'helc'h bac'h, zo en degouezh arouez ar meizadoù nidiadel.

~ Al lieselezh n'eo ket ar yoc'h ; ar galloud da gehentiñ a chom derc'hek el lec'h ma vank al lieselezh — pa vez an dud o realañ evel izili ur spesad pe unanenoù ur yoc'h, pa na chom kenetrezo nemet ereoù naturel pe gevredadel, familhel, kenelel, renkadel, kravezel, e ra diouer dezho ar ouested da zeraouiñ, ar galloud da niñvañ evel keodedourion en o rezid ; ensaviñ al lieselezh hag ur c'hedved zo digeriñ un egor a rezid o reiñ gwerc'h d'ar gwir he deus pep hinienn da gaout ur meno ha d'e lakaat da dalvout.

~ Ar c'hedved zo amplegad ar rezid ; ar rezid ne c'hell ket andoniañ ar frankiz — devezout, komz, kehentiñ — pa vank ar c'hedved : hemañ zo al leurenn diwel ma c'hell ur meno unveziat kemer ster evit an denion all ; en ur c'hedved hepken e c'hell an denion kenemanaout hag emglevout, naouiñ evel hinienoù unveziat, dre m' o deus ar galloud — hag ar gwir — da seveniñ o devezout dre ar gomz, da varn, da emzivizout, da emerzerc'hañ an eil re ouzh ar re all. Amañ emañ ar respont d'an eil aters savet a-zioc'h (p. 139) : e pe zoare eo lieselezh ha kedved amplegadoù an doujañ da wirioù mab den ?

~ Ar geodedouelezh zo amplegad ar c'hedved ; gwirioù mab den a raklaka ar gwir da vevañ en ur Geoded politikel ; ARENDT a gemer skouer ur c'hamp repuidi ; ennañ, er gwellañ degouezh, e vez diogelet ar gwared korfel, al loazioù danvezel, ar frankiz devezout ha dilec'hiañ, bennozh da emell aozadurioù karitezel prevez pe foran ; hogen emañ ar repuidi dindan grap un istor n'o deus int krap ebet warnañ, n'o deus ket perzh e kedved ar bobl all a c'houzalc'hont un darn eus he egor (lakaet e ve ur c'hedved diles e kerz ar bobl all), e se ez eo dic'hallus dezho amparañ ur Geoded politikel, piaouañ ar geodedouelezh.

Skouerioù all a c'haller ouzhpennañ. ARENDT a veneg staelad ar re zu en ur gumuniezh wenn en amzer ma veve hi er Stadoù-Unanet — a c'hellomp meizañ ervat dre skouer ar *sans-papiers* e Frañs : devezet e vez o gwezhierzh a-geñver gant an devoud n'o deus ket an un gwirioù hag ar riezaded ; n'o deus ket perzh el lieselezh, ne biaoont ket gwirioù mab den, en o zouez ar gevarzhelezh ; ar gwir o deus da zezevout, da gaout ur meno ha d'e eztaoliñ, met an eztaol-se n'eo ket parzhiat er c'hedveno : ar gouarnamantoù, an denegourion ne bledont nemet gant o saviad, anezhañ ur roed kevredadel, n'eo ket gant o meno — derc'hek e van o meno e kement ma 'z eo ar meno erzerc'had ar rezid.

~ En tu all d'ar gevatalded naturel ha kevredadel — etre hiniennoù ar spesad denel, etre izili ur genel, ur renkad, h.a. — emañ ar gevatalded politikel, ar gevarzhelezh ; houmañ n'eo ket un devoud roet met ur finvez a vuker dezhi dre berzh hon galloud da zistremen ar beziad ; “ne vezomp ket ganet kevatal, kevatal e teuomp da vezañ evel izili ur stroll dre berzh hon devredad da warantiñ gwirioù kevatal kenetrezomp” (LI, p. 290).

Stekiñ a ra aze ouzh keal an diforc'helezh. Ar gevarzhelezh, pa ampleg un distremen a 'r beziad, zo a urzh an hontkenderc'hañ. Alese, ar beziad distremenet zo a urzh ar bonveziad. Hogen ARENDT ne oar gwelout e danvez an kez bonveziad nemet un “drekleur deñval” a zeu “en he diforc'hted didruez” da zegas dimp koun eus “bevennoù ar gevatalded denel” (LI, p. 290). Hag ARENDT ha hañvalout sevel a-du gant “ar c'humuniezhoù politikel diorreet da vat, e-giz an hengeodedoù-Stad hag ar Stadvroadoù arnevez, ken evezhiek ouzh kudenn an ungenezh kenelel gant ar spi o devez da zispenn ken klok ha ma c'hellont ar seurt diforc'hioù ha diforc'hekadurioù naturel hollvezant, deluskerioù ar gasoni dall, an disfiz hag an disparzh” (LI, pp. 290-291). En dislavar emañ ARENDT ganti he unan ; e lec'h all (sl. p. 143 a-zioc'h) e lavar e “pourchas an natur danvez d'an oberoù denel” hag ez eo ar “gevredadelezh danvez rekis an denelaat” ; merkañ a ra dre se ar ret ez eo distremen natur ha kevredadelezh evel ma tistremen an hontkenderc'hañ ar bonveziadoù ; distremen avat n'eo ket distrujañ ; a dra sur, ez eo kontrol da c'halvedigezh mab den kehelañ an natur hag ar gevredadelezh evel an talvoudoù nemeto, ken kontrol all eo drastañ an natur ha forzhañ ar gevredadelezh. Kudenn houmañ a anavezomp mat evidomp p'hon eus da dalañ diouzh un tu ouzh ur galloud riezal mennet da unkenelaat poblañs he ziriegezh, diouzh an tu all ouzh dalc'hiaded varanek an disterañ diforc'helezh lec'hel. Galvedigezh mab den zo doujañ d'ar beziad n'eo ket evit lakaat e galon ennañ, met e kement ma 'z eo bonveziad an “deraouiñ ez eo bet ganet evitañ”.

#### **GWIRIOU MAB DEN “FROUEZH AN IMBROUD DENEL”**

Gwirioù mab den ne gavont o c'hantreizh nag en un natur, nag en un istor, nag en ul lezenn devoudel. Ar gwezhiañ denel el lieselezh hag er c'hedved ne raklaka patrom ebet. An den zo boud politikel, keodedour, dre e oberoù ha nann dre berzh ur bennaenn soliadet. Arbennet e vo ez eo dic'hallus diazezañ ur bennaenn wirel war hevelep meizadur eus mab den andireadus d'ur patrom hollveziadel. Mar bez an dended war eskor bepred e rezh un derou pur, ma ne zisoc'h ket eus argerzhioù

displegadus, penaos e c'hell keal gwirioù mab den bezañ amparet ? Mard eo digent ar gwezhiañ denel dre ma troc'h diouzh savelegezh an argerzhioù naturel, kevredadel, istorel, mard eo anrakweladus dre ma tistaol an holl batromoù, mard eo hep perak evel rozenn SILESIUS ha, dre se, mard eo an darvoudoù denel a urzh ar *c'hoarvoud* \*, penaos savelañ pennaenn ar forc'had etre pezh a zo ha pezh a zle bezañ — forc'had a gav ennañ gwirioù mab den o c'hantrevn\* ? ARENDT a respont : gwezhiezh mab den zo e andon er galloud da zeraouiñ hag e se ez eo andisplegadus ; pep deraouiñ a zelank un etrewezhiañ o kendamouezh un deraouiñ nevez pe, en eneb, o vont a-benn en un dastaol a denn da voustrañ ar galloud da zeraouiñ. Pennañ gwir mab den evit ARENDT eo enta ar gwir da embreger ar galloud da zeraouiñ. “E se, un anadenn denel, goude ma n'he displeger ket, a c'haller bepred he *barn*. N'eo ket evel just he barn en anv ur bennaenn desavelus o vezañ ma n'he gavaeler ket, e kement ha denel, e stern ur patrom pe un hollerdalad roet, nemet e c'haller he barn dre zasselliñ ster ar gedvuhez skoret ganti. Diwar neuze e samm keal gwirioù mab den un endalc'hed louerek kenan : stiet eo war ar gwir da embreger galloudoù a zo piaou gourzañvel mab den : ar varregezh da zeraouiñ, da wezhiañ, da gomz, da gehentiñ a zen da zen, da emzivizout, da emziskouez en e unveziaezh, da erzerc'hañ evel hinienn, da varn. Kollet gantañ an araez da embreger an kez galloudoù, e koll an den e wirioù piaouelañ. Rak se, ARENDT a wel evel ur c'holl eus gwirioù mab den an emblegañ d'ur patrom roet, hag eñ savet da bennaenn hollveziadel pe angemeret\* da reolad istorel, hag eñ intentet evel naturel pe gulturel, hag eñ ardaolet ouzh ar Poell pe ouzh an Hengoun, koulz hag an emblegañ d'an argerzhioù ha d'ar gwikefreoù pe an englozañ er c'helc'htroioù arreadek” (RL, pp. 51-52).

E berr, goude diskouez ned eo enskrivet gwirioù mab den en natur nag e solidadelezh ebet, e kred Hannah ARENDT haeriñ ez int “frouezh an imbroud denel<sup>1</sup>”. Notañ a ra ivez e teuas gwirioù mab den da vezañ un argraf politikel pa voe bet dilezet an doazhadur yuzev-kristen hag an dlead erverket gantañ da zoujañ “an den krouet diwar skeudenn Doue”. Daoust ha ne ve ket ur furm nevez eus an kez doazhadur a glever e komzoù ar Yuzevez ARENDT pa ziazez he meizadur eus gwirioù mab den war bomm sant Aousten : “Krouet e voe mab den evit ma ve un derou” ? Hag ur skeudenn eus Doue ne ve ket an den krouet evit krouiñ ?

### **NOTENNOU YEZHOURIEZH**

---

<sup>1</sup> En droidigezh c'hallek : “le fruit de l'invention humaine” (LI, p. 289).

[Etre sonnelloù emañ niverennoù pajennoù an destenn.]

Br. **angemer**. [138, 145]. Darbenn ub. pe udb. evel piaouer ur perzh lavaret ; sk. : “*angemer* ur bugel da vab”, “*angemer* ur gouarnamant (da reizhveli)”. Al. *anerkennen*, Sz. *recognize*, Gl. *reconnaître*.

Br. **c'hoarvoud**. [145]. Ur skouer hon eus amañ c'hoazh eus an durc'hadurioù ster a laka ARENDT da ziwanañ gant ar gerioù. Pa lavar : “er bed denel e vez an *event* hep arbenn bepred” (RL, p. 51), e kemer Sz. *event* (Gl. *événement*) gant ar ster “darvezadur an digent, darvoud evel eskoriñ”. Ar brezhoneg o reiñ dimp an dro d'e ober, e lakaan amañ war *c'hoarvoud* ar ster roet gant ARENDT da Sz. *event*, en ur lezel gant *darvoud* e erdal ledan boas. Soñjal a c'haller edo kizidikaet ARENDT ouzh steriegezh an termen gant an arver a rae HEIDEGGER eus Al. *Ereignis*, nemet e tispake anezhañ durc'hadurioù all (sl. KIS-578, La-12, p. 113 hag an notenn hir lakaet gant André PREAU e dibenn e droidigezh eus *Vorträge und Aufsätze* gant Martin HEIDEGGER : *Essais et Conférences*, Gallimard, 1958, pp. 348-349).

Br. **delvadur** g. [135]. Furm kemeret gant ur bennaenn, ur mennoz, h.a. p'o intenter hervez un doazhadur lavaret ; sk. : “an *delvadur* naturelour eus gwirioù mab den”. Gl. *représentation*, *conception*, *vision*.

Br. **digaezhañ** [135]. Dont e-maez a amzalc'h, a sujidigezh. Al. *befreien*, Sz. *emancipate*, Gl. *émanciper*. Sl. Br. *digaezh* aa. [134], e-maez a amzalc'h, a sujidigezh ; Br. *digaezhadur* g. [143].

Br. **goubadout** [137]. Kenderc'hel da vezout goude ma paouez elfennoù all. Al. *fortbestehen*, Sz. *subsist*, Gl. *subsister*.

Br. **goubarek** aa. [135]. ARENDT ha LEGROS d'he heul a ra gant *abstract*, *abstrait* en ur c'hemeradur nes da ster Br. *derc'hek*. Alese e kavan mat treiñ an termen dre *derc'hek* ha *goubarek* war un dro. Sl. ivez Br. *goubaregezh* b. [136], Sz. Gl. *abstraction* gant an hevelep kemeradur.

Br. **gwehan** aa. [140]. Diforc'h, evel perzh meizet diouzh an ental, eleze nann stadet dre geñveriadur gant re all, met evel o tougen ennañ e unan pennaenn e ziforc'hted, sl. KIS-737, La-14, p. 374.

Br. **kantrevn** b. [145]. Arbenn bezañ udb. e kement ma kav lec'h en un trevnad, un hollad kevanlen, un heuliad kempoell. Gl. *conséquent* (Br. *kavout e gantrevn e*, Gl. *se soutenir de*).

Br. **kedved** g. [138 & *passim*]. Bed boutin (Sz. *common world*, Gl. *monde commun*). Br. *kenved* a zec'her keal didro ur bed boutin hep daveiñ da natur ar c'heñverioù etre an dud en ampar ; Br. *kedved*, en eneb, a laka e penn kont keal ar c'heñverioù hag an darempredoù etrezo. Sl. **lieselezh**.

Br. **kedvuhez** b. [139 & *passim*].

“Buhez kevredigezhel. notenn. – Merkañ an diforc'h etre *ken-* ha *ked-* : *kenvuhez*, *kenvevañ* a dalvez pergen bevañ war un dro gant ; *kedvuhez* a ra, ouzhpenn, anv eus ar c'hejañ etre ar genvuhezidi hag eus ar c'hudennoù da heul” (*Dafar 63*, p. 18).

Br. **kesoutañ** g. [138]. Keñver etre ambredennoù kevarall eus an un beziadelezh : etre ar bev ambredet en un diarsell alvezel hag an un bev ambredet en un diarsell bevedel, etre mab den evel labourer ha mab den evel keodedour, h.a., sl. KIS-598, La-12, p. 249, n. 1. Gl. *articulation*.

Br. **kevaotañ**, **kevaotadur** g. [134]. An termennoù-mañ a arveran da verkañ furm hollekañ, neptuekañ al liamm etre bevion. Ar c'hevaotadur a gemer furmoù dibarek : *kevredad*, *kevredigezh*, *kevarzhe*, *strollad*, *yuzh*, *uniad*, h.a.

Br. **kevaskerc'hañ** [140]. Savelañ anaoudegezh un ergorenn dre he dec'havaelañ diwar-bouez lies diarsell o tont da emglokaat, da emreizhañ ha da emzervaat kenetrezo. Sz. *cross-check*, Gl. (*se*) *recouper*.

Br. **lieselezh** b. [138 & *passim*]. Ur skouer ez eus amañ eus an diruzadur a lak ARENDT da c'hoarvezout gant ster termennoù 'zo.

Al *lieselezh* (Sz. *plurality*, Gl. *pluralité*) ne verk ket hepken ar bezañ lies, nag ar bevañ lies a-gevret, nag un niver tud o ren kedvuhez a-gevret, met an niver tud o ren kedvuhez e kement ma 'z int hiniennoù unveziat en o rezid. Heñvel durc'hadur zo da gavout gant *kedved*. An notenn a-bezh a c'hell bezañ lennet evel un despizadur eus an daou dermen. Sl. **kedved**.

Br. **meurlidel** aa. [134]. A-zivout ur gread sevenet gant pompad war-benn reiñ arwarzh dezhañ. Al. *feierlich*, Sz. *solemn*, Gl. *solennel*.

Br. **nepeziad** g. [137]. Beziad diforz, e kemm ouzh *unveziad*, *hollveziad*. En nevezc'her-mañ, emañ gant *nep-* an un durc'hadur ster hag e *nebahelek*, *nebant*, *nebek*, *nepgour*, h.a. Gl. *être abstrait, individu en général*. Sl. *nepeziat* aa. [138].

Br. **unambred** aa. & g. [140]. A-zivout lies tud, o kaout un ambredañ unventek, eleze an un gweladurioù, santadurioù, menoioù e plegennoù diseurt ar

vuhez. Sz. *unanimous*, Gl. *unanime* — an termenouù gallek ha saoznek-mañ o vezañ kemeret gant un durc'hadur ster tamallus. Sl. ivez *unambretaat* [140].